

Pobl Vreizh

4

Mezheven 1981 - niv. 134



Breizh-Uhel o tañsal : ma 'z eo harpet ha skoret sewenadur galleg Breizh-Uhel gant heni brezhoneg Breizh-Isel, o deus memestra Breizhuhelis o gisiou hag o dañsù dezo o hunan... Ma 'z eo gwit eo bet miret broadelezh Vreizh gant Breizh-Isel dreistoll, n'heller ket lesel thor c'henvrois a Vreizh-Uhel gant o mez, evel ma vefe anezo Bretoned a eil renk. Bez ez int, int-i iwe, gant o gallaoueg, o dañsù, o doareoù labourañ ha keginañ, Bretoned a ouenn vad, bugale d'ar vro gozh, ken yaouank, ken nerzhus ha biskoazh.

**HARPIT
POBL VREIZH**
KRP 2746-79 ROAZON
CCP RENNES

11^{ed} listennad

| | |
|---------------------------------|----------------|
| J.C. Cassard, Naoned | 20,00 |
| M. Le Moign, Gwengamp | 10,00 |
| P. Cariou, Melven | 20,00 |
| Mark B., Isle-sur-Sorgue (84) | 20,00 |
| M. Genin, Roazon | 60,00 |
| Y.E. Ar Morvan, Bear | 60,00 |
| J. Gros, Lokerno | 10,00 |
| E. Evenou, Ajen | 60,00 |
| A. Le Gal, An Oriant | 110,00 |
| M. Briant, Perros | 10,00 |
| R. Bizien, Limours (91) | 40,00 |
| Y. Segalen, Plabenneg | 20,00 |
| P. Bernard, An Oriant | 20,00 |
| M. Jean, Gwengamp | 20,00 |
| J. Marot, Ar Releg-Kerhuon | 160,00 |
| 570,00 | |
| Diwar al listennadoù all | 5650,00 |
| 6220,00 | |

komanant ordinal POBL VREIZH da 50,00 L, ar c'homanant-skaoz da 70,00 L pe ouzhpenn, ar c'homanant ewid an estrenvro da 70,00 L ive ; 50,00 L e vo POBL VREIZH gwerzhet niverenn ha niverenn.

Degass a raomp da soñj d'hon lenne-
nion ha komananterion n'eus ket bet
kresk war bi/POBL VREIZH abaoe an
niverenn 108 (Genveur 1979) : daou
vloaz hanter zo eta. Abaoe ez eo aet an
traou war-raog 26%-27% pe wardro.
Gant ar c'hresk lakaet war bi/POBL
VREIZH e penn kentañ mis Gouhere, ne
raomp eta nemed adadapout an dilafas
bras a oa ganeomp. Sur omp e kom-
preno hon lenneion ha komananterion e
oa red deomp ober un dra bennag ewid
aessaad da deizorezh POBL VREIZH.

Dalc'ht memestra, lenneion ger, da
gass deomp ho kwennien : ne vo ket
unan re. Alies e vez lavaret pe skrivet
deomp eo POBL VREIZH ur gelaouenn
fichet kaer, treset braw, moulet fin.
Gwir eo, mechañs. Ober a raomp eus
hor gwellañ, micherourien ha micherou-
ressed an ti-moullerezh « Iroise » a ra
kernadall. Nann, ne gav ket deomp e
raomp goap eus ar brezhoneg en ur
gempenn POBL VREIZH evel ma vez
gwraet. Siwazh, ar pezh a vanik eo an
duñ gouest da lenn brezhoneg, pe
c'hoant gante d'henn ober. Sed e chom
POBL VREIZH, evel an oll gelaouenn
brezhoneg moarvad, ur gasetenn goant
lennet ganti nebeud a lenneion. Ne
vern : red eo ober ton d'ar brezhoneg ;
an ton gwraet dezañ n'eo nemed un
doare da zoujañ ar re a ra gantañ ; un
doare eo ive da embann a vouezh uhel
— hag a niverennou POBL VREIZH
fichet kaer — n'eus ket eus Breizh heb
brezhoneg. Beteg ur serten poent d'an
nebeutañ.

POBL VREIZH

KOMANANTOÙ

| | | |
|---|---------------|---|
| P | boutin : 40 L | V |
| O | skaoz : 60 L | R |
| B | pe ouzhpenn | E |
| L | KRP ROAZON | I |
| | 2746-79 | Z |
| | C.C.P. RENNES | H |

Ti-Moullerezh « Iroise »
29200 Brest
Rener ar Gelaouenn
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 091
1500 akwerenn

Un trec'h d'an nebeutañ. Act
eo F. Mitterrand e-barzh. A-
benn ar fin. Red eo anzav ez
eus anezañ un den penneg ha
stard en e ratozh. Goude bezañ
bet c'hwitet diw wech, ha bezañ
bet mezhekaet epad kehidall,
ema bremañ e penn an traou.
Abaoe m'eo bet savet ar 5^{ed}
Republik, ez eo ar President
par d'ur roue. Pas tre d'ur roue
diharz e c'halloud, mes kalz
ledannoc'h eo galloud president
ar Republik C'hall eged heni
roued an Espagn, e-gis Juan
Carlos Spain, Elesbed Breizh-
Veur, pe Baudouin, roue ar
Veljed...

Tennañ 'ra an oll o anal, ar
Vretoned hag all, ha n'eo ket
hebkén e Plogoñv. Ne oa ket
possubl ken chom dindan
gwaskerezh Giscard. Kompre-
no o deus ar Vretoned. Rag,
pa vez gwraet ar gont eus ar
mouezhioù aet war hanw
F. Mitterrand d'an 10 a vis
Mae, e weler ema Breizh dre
harz mont war an tu kleiz da
vad : n'eus manket d'ar Presi-
dant newez nemed 34 000 a
vouezhioù ewid roñ lamm da
Giscard war zouar Breizh he
femp departamant. Eveljust,
ma ne vefe bet nemed Breizh,
e vefe aet Giscard e-barzh en-
dro. D'un dra bennag evelkent
en deus servijet da Vreizh bezañ
staget douzh Bro-C'hall, bezañ
ur rannvro eus ar Frañs...

Gant ma vefe memestra
estreged ur rannvro eus ar
Frañs. Gall eo ar President, ha
ne c'hell nemed bezañ Gall.
Petra 'ray ar vinstred eus
Breizh aet e-barzh ar gouarn-
mant newez ? Petra 'ray Loeis
ar Peñseg, ministr newez ar
mor ? Na Petra 'ray Herve,
maer Roazon aet da vinstir ar
yec'hed ? Daoust hag-eñv e
teus soñj dezo a-wechoù eus ar
vro gozh ? Braw eo moned da
servijñ Bro-Frañs, hag arabad
ankouaad ez eur Breizhad da
gentañ, pa vezer Breizhad, hag
an daou-mañ zo.

Eveljust ez omp laouen bras,
ni amañ re an UDB, gant trec'h
Mitterrand, ha ne fell ket

AN TREC'H...

deomp disterraad al lañs a zo
gant an tu kleiz gall aet e-barzh
assemblees gant Sekretour Meur
ar PS. Bremañ ni, amañ re an
UDB e Breizh, ez omp lod eus
ar majorite newez. Sed ase un
dra na oa ket bet en em gavet
gwech ebed gant an UDB,
abaoe ma 'z eus anezi. Ne rimp
sort ebed eta ewid gwannaad an
nerzh hag an esperañs newez
diwanet e-kreis pobloù ar
Frañs.

Se ne vir ket e chomimp ni
hon unan : sokialourien hag
emrenerien. Ha setu perag,
ewid ar botadegoù da zont, e
vo tud eus an UDB war ar renk
adare. Rag piw gwelloc'h egeti
a c'hell degass da soñj da Loeis
ar Peñseg, da Herve, ha da
v/Mitterrand, ar pezh a zo bet
prometet gant pennrener ar PS:
digreissenañ, sevel rannvroù
dezo ur galloud gwirion, diskar
Les Surentez ar Stad, en tu all
d'ar gwellañnoù war an
dachenn sossial hag a zo ive,
eveljust, traou red e-toues ar re
retañ.

Mont a ra an UDB d'« ar
glaou » eta. A-du gant ar majo-
rite newez, mes banniel Breizh
ganti war wel muioc'h eged
biskoazh.

D'AR 14 A VEZHEVEN, E
VOTO AR VRETONEK KAR-
O-BRO EWID AR GANDITA-
TED UDB, er pastelloù-votiñ
ma vo unan anezo (gwelit ar
gartenn pp. 6-7).

Harpet eo an UDB gant
PSU-Breizh.

Er pastelloù-votiñ ma 'z eus
ur c'handidat eus PSU-Breizh,
e c'houlenn an UDB votiñ
ewitañ.

E pastell-votiñ Plogoñv-
Douarnenes-Brieg, ez eo ar
c'handidat ur PSU-Breizh, an
adkargad un UDB, Herve
Latimier : votiñ ewite.

Er pastelloù-votiñ ma n'eus
na kandidat UDB na kandidat
PSU-Breizh, e c'houlenn an
UDB votiñ ewid unan eus kan-
didatad an tu kleiz gall, ma vo
skarzhed re an tu dehoù.

En eil tro, e c'houlenn an
UDB votiñ ewid kandidat an tu
kleiz aet ar muiañ a vouezhioù
war e hanw en dro gentañ. Er
pastelloù-votiñ ma 'z eus ur
c'handidat UDB en dro gentañ
ha ma vez aet ar brassañ niver a
vouezhioù war unan eus ar gan-
didated all eus an tu kleiz, e
c'houlenno ar c'handidat UDB
votiñ en eil tro ewid hennezh.

Petra c'houlennomp ?



Daou bresidant : an heni kozh hag
an heni newez ; an heni a weler
war an tu dehoù zo deus an tu
kleiz, hag an heni a weler war an
tu kleiz zo deus an tu dehoù...

Iwerzhon an Hanternos...

Pa vo laret mad, mard eo protestanted an Hanternos ken mennet da chom « Saoson », ez eo abalamour da veur a dra. N'eo ket dister ewite ken-gred Bro-Saos : un harp evel heni ar Rouantelezh Unanet n'eo ket unan laosk. Ouzhpenn kement-se emma ekonomiezh an Ulster etre daouarn ar protestanted, hag emaint diasezet e gwellañ tachennoù ar c'hornad hag e gwellañ karterioù ar c'harioù. Impossibl eo nac'h n'eo ket gwasket ar gatoliked en Ulster : ar baourentez, an dilabour, ar mezhekadurioù, setu ase o bara pemdezieg. Bez ez eus anez eo ewid gwir keodedis a eil renk eus ar Rouantelezh Unanet. Rag ton 'vez gwraet d'ar brotestanted gant ar Saoson : leset e vezont da fuloniñ, da skoñ, da lazhañ. Erav eo degass da soñj komz an Aweil : « Ma vezes jodadet war da lod dehoù, kennig da heni gleiz ». A-hentiennoù e c'heller heuliañ ur reolenn ken uhel-se. Ur boblad tud, hag hi bresset kehidañ, zo n'hell ket gousañv bezañ renet evel ur bagad deñved...

Petra ober ? Petra da gennig ? Sur eo n'eo ket marw **Bobby Sands** hag e gamaraded ewid petra. Dalc'hmard eo bet gwad ar verzherien un had o fruezhusaad douar santel ar vammvro ; ne c'hell skwer **Bobby Sands** nemed entañ brogorerien Iwerzhon an Hanternos.

Moarvad ne lenno ket **Margaret Thatcher** an niverenn-mañ eus **Pobl Vreizh** : n'omp ket tud « seven » awalc'h ewit. Lavaromp hor soñj memestra. Red eo unvanit Iwerzhon, en ur stagañ an Ulster d'ouzh an Eire. Ha red eo neuse d'ar brotestanted assantif bevañ evel Iwerzhonis, hag n'eo ket evel Saoson, « Treid Du » o vestroniañ kontelezhioù an Hanternos. Red e vo eveljust kevredelañ an Ulster, ma c'hello ar brotestanted miroud o fersoniezh hag o relijion. (E gwirionez n'eo ar relijion e-barz an ater-mañ nemed un digarez : « Saoson » en em sant ar brotestanted, hag Iwerzhonis ar gatoliked). War ar memes tro e vo red d'an Eire chañch stumm, ha dont da vezañ ur Stad laik, ma c'hello peb heni bevañ herwez e relijion, pe chom heb kaoud heni ebed mar kar.

Ha, gwazh-se ewid ar Saoson, emaint oll, pedost, o vont da heul o C'heñtañ Ministris hag o tiskoez ar memes krizder. Warbous unan benag, ha warbous ur c'hannad pe zaou eus Bro-Gembre...

Diskoez he deus Bro-Saos n'eo ket ewid dont a-benn eus kudenn Iwerzhon an Hanternos : spartel eo ar speredoù eno gant rogoñ ha lorch kozh ar Saoson, a gav dezo ez int gwelloc'h ewid ar re all. N'eo ket aet d'an traoñ spered impalaerel ar Stad saos.

Red eo eta etrevroadelekaad kudenn an Ulster : ne c'hell ket ar milion a brotestanted a orin saos pe skossad bevañ e peuc'h gant ar pem kant mil a gatoliked a orin Iwerzhonad. E-pelec'h eta emma an diskoulm ?

Gwir eo o deus paotred an IRA-provisional gwraet gant ar feulster. Med piw n'eo ket ar reverant **Paisley** un den feuls, dajnerus, anezañ ur gwir suner-gwad ?

Ha petra 'ra Iwerzhonis ar C'hreisteiz ewid o c'henvrois an Hanternos ? Petra eo Stad an Eire, ma n'eo ket unan o toujañ Londrez, hag o kass katoliked an Hanternos war hent an disesper ?

Ma oa **Bobby Sands** un « terrorist », ez eo bet an « terrorist »-se dilennet evel kannad gant e genvrois : pa vez ar bobl a-du gant un « terrorist » sort-se, pa vez gweliet kemendall a dud o kass d'ar vered e gorf paour, daoust hag e c'heller c'hoazh ober « terrorist » eus ur boblad tud ? « Terroristed » oa iwe tud ar Resistañs ewid **Pétain**, « terrorist » iwe paotred an FLN ewid ar Frañs etre 1954 ha 1962 (hag emma bremañ an d « terrorist »-se e

Pa vo laret mad, mard eo protestanted an Hanternos ken mennet da chom « Saoson », ez eo abalamour da veur a dra. N'eo ket dister ewite ken-gred Bro-Saos : un harp evel heni ar Rouantelezh Unanet n'eo ket unan laosk. Ouzhpenn kement-se emma ekonomiezh an Ulster etre daouarn ar protestanted, hag emaint diasezet e gwellañ tachennoù ar c'hornad hag e gwellañ karterioù ar c'harioù. Impossibl eo nac'h n'eo ket gwasket ar gatoliked en Ulster : ar baourentez, an dilabour, ar mezhekadurioù, setu ase o bara pemdezieg. Bez ez eus anez eo ewid gwir keodedis a eil renk eus ar Rouantelezh Unanet. Rag ton 'vez gwraet d'ar brotestanted gant ar Saoson : leset e vezont da fuloniñ, da skoñ, da lazhañ. Erav eo degass da soñj komz an Aweil : « Ma vezes jodadet war da lod dehoù, kennig da heni gleiz ». A-hentiennoù e c'heller heuliañ ur reolenn ken uhel-se. Ur boblad tud, hag hi bresset kehidañ, zo n'hell ket gousañv bezañ renet evel ur bagad deñved...

Aet eo ar Saoson, da heul o Marcharid, en tu all d'ar vezh, p'o deus laret e oa en em zistrujet **Bobby Sands** en un doare diboeñ. Marw eo ewid e vro hag e uhevelnaded, kehidañ ha ma oa Marcharid o vale bro hag oeb ober chervad. Ma vefe bet ar Saoson tud ken « seven »-se, o defe bet un tamm doujañs ewid unan eus « o » c'hannaded (ahanta, ya !) aet da Anaon en un doare ken nobl. Ouzhpenn bezañ tigez, leoned, ha bleidi, o deus diskoezet ar Saoson e oant bleizbroc'hed.

F. Morvanou



Bugale katolik en Ulster

STAD AN ULSTER

Bobby Sands, esel an IRA ha kannad Ulster da vond da Parlamant Londrez, zo marw yaouank flamm goude daou vis chan-debrñ. Unan all zo marw c'hoazh diboa. Trist ha manrus eo. Penaos emma an traoù gant ar Gatoliked en Ulster, ma n'en em lesk da vervel tud yaouank, evit lakad an dud da yaovezout o stad ?

Sur, ewid leset e dammig buhez da vont kuit e gis-se, emma daw bezañ eun tammig « maozochist » ha kaoud c'hoant d'en em lazhañ. Ouzhpenn, enoret vez ar verzherien gant an Henc'his katolik.

Ha bez' zo ur bresel a relijion e Iwerzhon an Hanternos, e-gis vez lakad an dud da gredañ ? Ur milion a deus Bro-Saos ha Bro-Saos tri c'hant vloaz zo, zo o vevañ en Ulster gant 500 000 a Gatoliked.

Didammet eo ar vro ewid ar bota-degou da harpañ ar strolladou politikel protestant a-du gant ar golonialistek saos. Etre daouarn ar Brotestanted emma al lod brasañ eus an ijine-rezh, ar c'hoarvezh, an argant. Renket o deus ar Brotestanted toud an traoù ewite o hunan 'wid pezh a sell d'ouzh al labour, al lojeis, ar skol. Ne chom nemed brunusioù ewid ar Gatoliked, alies forset da vont kuit d'an USA, pe da Vro-Saos, ewid kaoud labour.

Istor ar vro kelennet ba skolioù eo heni ar Saoson ewid ar Brotestanted, ha heni emgann Bro-Iwerzhon da c'houid he frankis ewid ar Gatoliked.

N'eo ket ur bresel etre diw relijion, med un emgann etre daou rummad deus ar c'hevredad, ar re emma gante an argant, ar c'hospital, hag ar re wasket. Bez' ez eo un emgann trevadennel, renet gant ar Gatoliked, aet skuzh gant ar gassoni, an dimegians hag an dieudener.

Ur strollad feuls eo an IRA. Toullbac'het eo bet **Bobby Sands** peogwir oa bet tapet oc'h ober gwall-daolioù. Bez' ez eo ar feulster en Ulster ur voian bolitikel degemerus ? N'eo ket, peogwir, e-barz ar stourm etre ur vinoriezh tud paour hag ur vajoriezh tud ar galloud gante, e vez gwraet gwall vrud da feulster ar re



En Ulster, soudarded saos, bagol ha diskiant.

wan, tra ma vez tawet war waskerezh ar soudarded saos : ar re-mañ ne vezont ket pell o reiñ koad d'ar **Sinn Féin** (ur strollad hag a zifenn ar Gatoliked). Padal, en desped da feulster an IRA, e chom brein stad an traoù en Ulster. Heni an dispi eo feulster an IRA.

Penaos diskoulmañ ar gudenn ? Gant sikour Republik Bro-Iwerzhon ar C'hreisteiz, lec'h m'emma an 3/4 eus an dud a-du gant unvanidigezh Bro-Iwerzhon.

Bremañ emma stard an traoù, peogwir emma gouarnamant Dulenn e-diabarzh ar bed kapitalist : leusker a ra Bro-Iwerzhon ba marc'had diabarzh Bro-Saos, ma red ennañ, diharz, al labourerien hag an argant.

Ne vo spl da chañch stad fall an Ulster nemed pa vo ur gouarnamant sokialour e Dulenn, prest da bountañ ar galloud saos maes eus Bro-Iwerzhon. Kreisteiz ha Hanternos, ewid dieubiñ ar Gatoliked en Ulster.

Mari-Jose Alanot

M.T. Laot

AR FALZ

kelaouenn drimisek an Emsav diasezet gant Yann Sohier, bodet ennañ skolaerion ha kelennerion. Vreizh a-du gant ur skol vreizheg ha laik gwirion.

Lennit Ar Falz ! Komantit d'Ar Falz !

AR FALZ, Str. Kan Ar Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRouLES
KRP 430-20 H.ROAZON

AL LIAMM

ar gelaouenn nemet o triñ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù a beb sort ha keleser 80 pajenn e peb niverenn. Rener : Ronan Huon
komant : 50 L. Studieren : 35 L
Tehzorer : merou - P. Le Sihan - 16, rue des Fours à-Chaux
ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

ISTOR KASTELL «JOYEUSE GARDE»

E bourk Forest-Landerne e vez gweliet dismantrou ar c'hastell hag a zo unan eus ar c'hastelloù kozh-se ma red diwar o fenn, en tu-mañ pa en tu all d'ar wirionez istorel, mojennoù a beb sort anezeo darn eus lennegezh Vreizh. Kastell « Joyeuse Garde » eo.

Diouzh ma lavar lod eus ar bourk, er c'hastell-se e oa Marc'hegourien an Daol Grenn o chom. Ouzhpenn-se, er c'hastell-se endeeun edo **Tristan** o c'hortos e vestres, pa 'n em gavas war wel gouel du hag distro lalid melen he blew ; du ar ouel, e-lec'h bezañ gwenn.

Ul lec'h brudet a vefe hemañ ewid ar Vretoned ma vefe desket istor o bro dezo. Siwazh, ne vez ket gwraet : e-keñver amzer dremenet he bro ez eo divemor pobl Vreizh. Ha setu perag e Forest-Landerne ne vez ket gwraet van ewid gweliet dismantrou kastell « Joyeuse Garde » o vont d'ober rouantelezh ar balan hag al linad. N'eus nemed touristed a-wechoù a gement a zeu gwel d'ul lec'h merket war o levr-ambrouger evel unan brudet.

Ya, tud estren en o bro eo ar Vretoned. Hag en deus diviset kusul ti-pezh parking ewid ar gveturioù war dismantrou kastell « Joyeuse Garde ». An traoù kozh n'o deus talvoudegezh ebed, anad eo kementañ d'an dud a-fesson eveljust. Bez' ez eus tud yaouank eus ar bourk koulskoude hag a zo a-eneb ar pezh zo bet diviset gant kanfar-ded an ti-keñ... Un nebeud bloawezhioù zo e oa ur gevredigezh, « Rempart » he harw, ma oa bodet emni yaouankioù eus ar vro, hag eus broioù estren iwe, he fal adkempenn dismantrou ar c'hastell. Ma 'z eo aet da get en dez hiziv ar gevredigezh-se, e chom e lod eus tud yaouank ar bourk ar c'hoant da viroid kement hag a zo bet aet d'ober istor ar vro. Gant an newez-amzer o tont, e sav darzherzh bevañ ha c'hoant-krouñ e kalon tud yaouank zo.



R. L'HOSTIS
BREST 2



I. ABIVEN
MONTROULES 2



J.J. MONNIER
LANNUON



H. GOURMELEN
SANT-MALOU



Y. DAUMER
BREST 1



P. DE QUELEN
GWENGAMP



F. MORVANNOU
KASTELLIN



M. RANNOU
ROAZON 2



P. GUEGUENIAT
KEMPERLE



S. GILLET
AN HENBONT



B. GUERIN
GWENED



Y. QUENEHERVE
AN ORIENT



J.L. JOSSIC
ANSINIS

J. L'HERITIER
SANT-NASER



P. PELLEN
NAONED 2

15 kandidad eus an UDB e vont war ar renk, un tamm peb lec'h e Breizh, Bro-Naoned hag all eveljust. Bez' eus an UDB bremañ e-barzh ar majorite nevez, hag e sko war an tu kleiz gwelloc'h eged biskoazh, mes war an tu kleiz breizheg. Goulenn a ray kandidated an UDB, fraezh, an emrenerezh sokialour ewid Breizh. Bez' e c'hell an emrenerezh-se bezañ tizhet pasenn-ha-pasenn eveljust, med red eo diskouez ar dal, heb chom da doriañ. Ar Vretoned emskianteg, kar-o-bro, kar-ar-justiss, kar-ar-brezhoneg, hag all, hag all, eus o dever votih o ewid an UDB ha lakaad an dud da votih ewiti. Kemromp eta penn an hent : poent eo.

TRAOU GWIR, GWELET D'AN 10 A VIS MAE

Distanet terzhenn an dewezhoù diaraog. Kêr an amzer er mitin-mañ, gant kêr ha ma oa hudur en dro gentañ, gant awel pud ha glow bras. Distanet da dud ar radio hag a tele iwe, goude ped sizhun-wezh fistic'h ha gibousserzh ! Ken treitour ar re-mañ ma toe an den da ziskredif : douz gweled ar sifroù en dro gentañ, e tlee bezañ mod, ha warlerc'h un toulladig dewezhoù, ne oa ket koulz, na tost.

Muioc'h a gred deus ar re gozh evl-ent : « Kofhiñs 'm eus », a lâr an eil hag egile, « labouret mad 'm eus », a lâr hemañ all, « pennoù bras an RPR (bar barres) n'aint ket da votiñ... ». Muioc'h aon deus ar re yaouank, affin, ar re ban oajou ganeomp... Muioc'h int boemet gant an tele mechañs !

Oc'h ober un tamm c'hwenañ bar-jardin — kêr ar salodenn, an ognon hag ar chalotes, ha diwanañ 'ra ar potato, med al louiseier fall iwe, treusyoet, kool-moc'h pe kool-teol hag askol... Ha gweled a ran an ameseien o vont trema 'r bouk, tud leizh an otaioù, ar vamm-gozh hag ar voreb ban tu adreñv, ar vugale war o barlien ! Amañ eo ruz ar re gozh, dre vras ; mad eo. An dewezhoù araog ar vol eo bet an « avokaded kampagn » oc'h ober un tamm kentel pe lesson d'ar merc'hed kozh ». O ya, eme-hê, med Fafich pe Job pe Pier (marw ulgent pe dregont vloaz so) zo bet ruz dalc'hmad hag ar mab zo iwe, skoloer pe medisin, ha me n'an ket da c'hañch (goude 'kasso anez e ameseg a-zehoù da votiñ), n'an ket ket sod !

Viss fall o deus ar beaisanted vras, re wenn ewid ar wech toud, ha geisoù ha gewier leizh o genoù : « me 'h a da votiñ Mitterrand ban eil tro, med kalz Chirakmed zo treitour, gwel' a ri, ha 'voto a-zehoù ». Ur fesson all da ziskrouññ tud so i med an dra-se 'gerzh ket...

Klaved a ran bar post lâr 'h a muioc'hig tud da votiñ hiziv ; sin mod pe fall : remerket 'm eus lâr zo bet forzh komunisted a chom bar gêr penzgetez so, heb kontañ an udebisted o deus gret memes mod pe votet gweñ. Gwelet vo...

Poent mont d'ar bouk. Gwechall 'vese

ur buru-votif amañ gis-mañ, ba kêr, ha goulet e vese draog ped mouz'h afe gant hemañ pe hennezh — bremañ bepred oar an den penaos e vot e ameseg, ousoch awalc'h. Mesket e vez mouzhoù an dro gant re ar bouk ha goueal ar barres, a zo gweñ, ha n'eo ket ken skloer ar jeu.

En abardaez-mañ 'ma kermess ar skol. Ur bern tud, tud anavezet, deuet d'ober un tamm tro, d'evañ un tassaù ha da foetañ ur gwenneg pe daou, goude tremen bar buru da votiñ etre daou pe dri gofsoññer lîrzhin ha ruz o glipenn d'an eur-mañ dija...

Memes kont a vez amañ : fiziñs o deus ar re gozh, ar re a gustum jedif ba o fenn, ha nec'het kalz re yaouank, tud dilabour, pe peaisanted yaouank dindan die, prest d'ober foet bouk. Hag ar skoleerien, ma Doue, berwiñ 'raont : ma tap Mitterrand pemp ha hanter-kant dre gant bar barres, neusen omp barreg. Ha bannac'h, forset mad ! Mousc'hoarzhin a ran da d-zeoù, mousc'hoarzhin gias dija memestra : kof-versanted ha « pennoù bras » o telc'her an ostaleri bar c'hourt. Diforzh eo ar moer kozh, ar heni en deus stourmet kement ewid ober stank Lemezeg ha fabrik Plogoñ... Damañ 'vo gwelet.

Krag an heul da isellad. Nebeutaet eo an dud bar goet : aet an dud d'ar gêr da c'hor ar saout pe da goss ar vugale vihan da gausket. Aet heniñnoù d'ar moeri araog c'hwec'h eur. Ton a ra ar re a zo memes tu ganeomp : peaisanted kozh koulz ha yaouank, « poent eo c'hañch un tamm », ha tud a-vod ar bouk memes, n'int ket kustum d'en em zisklêriañ koulzoude. Un dra bennag zo ban aër.

En ur arriñ da c'hwec'h eur hag ugent ba ur sal peusgoullanter choazh, n'eo ket bet pell ar savantenn a zo abanon o kompren : pokañ ar brassoc'h ewid Mitterrand, linennoù hirac'h war ar paperioù ha pennoù tud... Penn trist, penn kozh, penn fall... Gant an noter, é vewel, ar baroer,

beg-e-dok war e leve ha « tutti quanti », Lennet e vese war o bisaj. Seberroet diouz ar re ruz, fin awalc'h d'ober ar gant en taal-mañ. Giscard : 547, Mitterrand : 773. Ur gant, buan : 58% ! Mad eo, graet eo o jeu.

O tont maes ar sal, didraus kâsimant, ken souezhet an eil re, ha mezhig ar re all, 'h an da evañ ur bannac'h, gant ar moer kozh, un gweñ ma 'zo, hag ur c'hamarad dehañ ha ruz-skloer. Ha me ober geisoù, a-fetepañs : « Mad eo, komañset an douar da risklañ... »... « Hemañ all, gweñ ha mezhig » ; « Te 'vezes ket pell oc'h ober kañchoù, me n'an ket sur »... Ken « kon-fiñs » evel a lâr, al lardienn !

Ba Karaes, deg munut goude eo muioc'h inervet an dud : ouzhpenn 64% Mitterrand, stlakedeg douar. Ar re a-zehoù zo tresset fall, prest da fatiñ. Er wech-mañ meump gonezet : 'Peb lec'h ba kris Breizh en deus souset Giscard adreñv : an eil ma ba toud parrosioù ar c'hanton, hag ar c'hantonioù all, Kallag, Mael, Rostrén, Gourin memes hag ar C'hastell-Nevez, nemed ur barres a zo chomet gweñ ha gweñ mat : Koloreg... Keuz o do mechañs tud so eno, evel ba Kerlouan pe Wallis ha Futuna, bezañ oet war an tu fall, rag an tu-c'honid eo an tu mad, 'keta. Med keuz warlerc'h ne dalv ket !

Fenos vo plijadur. Ha boesson. Daw mont da goss keboù d'ar gêr, lâréd an dra-se d'an ameseien ban ti tastañ, telefonif da'm zud. Ur c'harder araog an tele. N'int ket sur deus ar pezh a lârén dehe. « Gwel a ri, 'benn eizh eur ! »

Bremañ eo tro ar journalist trist — mewelen Giscard — da gaoud keuz. Dafi-sadeg lec'h all. Tud o pokad an eil d'egile. Jaa etre an dud, etre hon zud bepred. Gant ma pado...

F. Favereau

Gouel Pobl Vreizh

Daleet... A-wechoù e vez red plegañ d'ar re a gomand e Paris. Pell zo e oa bet diviset gant an UDB ober Gouel Pobl Vreizh d'an 13 ha d'ar 14 a Vezheven. Abaoe avad ez eo aet F. Mitterrand e-barzh, hag ema bremañ e penn ar Stad. Ha gweil-a-se eveljust. Prometet en doa, ma 'z afe e-barzh, e vefe divodet ar Gamp gantañ, ha gwaet botadegoù newez ewid lakaad ar Gamp da-zont da vezañ muioc'h diouz c'hoant ar President newez, eveljust.

Divodet eo bet ar Gamp gozh, ha galwet ar sitoañned da votiñ d'ar 14 ha d'an 21 a Vezheven. Diaes 'vefe bet prouiñ eo Gouel Pobl Vreizh unan n'eus tamm liw politikel warnañ ! Ha peogwir n' heller ket ober politik e mod ebed un dewezh botadeg, eo bet diviset gant an UDB daleañ Gouel Pobl Vreizh.

An dale, avad, a ranko bezañ hirig. Rag n'eo ket braw torriñ kontrañnoù kanerien vrudet, hag ober ur c'honrad all ewid eizhtez goude. Abenn ar fin e vo red gortos derou an diskar-amzer, ewid ober Gouel Pobl Vreizh ar bloaz 1981. Da gentañ e oa bet klasket henn lakaad d'ar 26 ha d'an 27 a vis Gwengolo, med santel eo an deziou-se e Brest : Foar Vikael 'vez. Moarvad ez eo d'an 3 ha d'ar 4 a vis Here eo e vo gwaet Gouel Pobl Vreizh, dont da Vrest : ne vo Gouel Pobl Vreizh ebed d'an deiz-se. Gwelloc'h ganec'h chom er gêr, med arabad ankouaad mont da votiñ. Ha mard emaoch'o o chom e Breizh ha war ur bastell-votiñ ma 'z eus ur c'handidat UDB war ar renk, votit ewitañ eveljust. En dro gentañ, kenkas n'ho pefe ket tu d'henn ober en eil tro...

Savet g'd S.K.A.F. BRO-GWENED (skolaerion ha kelennion AR FALZ)

STAJ DAOULAMM BREZHONEG GWENED

Adaleg an 2 betek an 8 a vis Gourhelen 81 en « Institut Consulaire »

GWENED

25 plass strolladigoù labour labourva

PRIS : 650 lur (kontet an deskadurezh, ar gamp, ar boued)

Titouroù pe enskrivadurioù ged :

Jea-Claude LE RUYET
Skol publik
Ar Priold
56840 ENES ARZH
Pellgomz : 26.34.65

JAZZ E BREIZH 31

CHATEAU de LA ROCHE JACQ

57000 PUSSELAN - TEL. 02 35 23 02



War niverenn diwezañ Pobl Vreizh (niv. 135, p. 9) ez eus bet moulet un pennad-kaoz gant Jan Press, hag a zo ur Saos oc'h ober skol vrezhoneg e Londrez. Setu amañ Jan Press, e bried hag unan eus o bugale.

Komanant d'ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn

Pobl Vreizh (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gass e gomnant
Boutin : 40 L (1)
Skoaz : 60 L pe ouzhpenn (1)
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) dre vandat-lizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2746-79

(1) Diverket ar gerioù na servijont ket

Ar bed Keltiek

2, str. ar Roue Galon
KEMPER

Embannadurioù ha levrioù breizheg
Pladennoù hag artizelezh keltiek
Gweltes ar Fur
Tel. 95.42.82

Komanant d'ar gelaouenn c'hallec'h an UDB

Le Peuple Breton (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

Boutin : 50 L (1)
Skoaz : 70 L (1)
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) dre vandat-lizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2365-76

(1) Diverket ar gerioù na servijont ket




LIZHEROU

Kenvroidi ker,
 (...) Krenn ha krak e lavaran deoc'h ez eo ur vech ruz bezañ embannet ho niverenn 127 gant war ar golo 5 kanfard aszet war barrkennoù gwin. Ober ur seurt bruderezh pa oar peb heni ez eo Breizh kampione ar bed an evrien alkohol, zo e gwirionez un torfed ! N'eo ket paotred « Le Peuple breton » am zislavaro, peogwir ar gerioù « La Bretagne championne du monde » zo bet moulet, e lizherennoù bras zoken, war golo un niverenn.

Evel ma ne vije ket bet trawalc'h a vru-derezh evelse ewid ar gwin (gwin ar C'hallaoued !), hoc'h eus goude-se lakaet moullañ ar skeudenn-se, ur skeudenn vil war ar marc'had, war ho teizadur. Soñjal a rafen awalch ez eo bruderezh paet gant sindikad ar varc'hadourien gwin !!!
 (...) A galon ganeoc'h er stourm ewid ar brezhoneg.

marw eo bremañ, goude ur vuhez labour er viererezh-se ; ur vuhez labour, ha n'eo ket ur vuhez bambocherezh. E yab, n'eus ket anezañ ur boessoner kennebeud, nag ur sioc'h an...

2. Ne c'hell ket labourerien Vreizh choas dalc'hmad ar vicher o defe c'hoant d'ober. Lod a rank ober bier, ewid distañ da c'hourlañchenn ar re all... Lod all a ra wardro gwin pe patates ; hemañ zo o



labourad en un fi-bank, daoust ma n'en deus tamm c'hoant ebet da roññ darn d'ar gopitalouriezh da chom en he sav ; lod all c'hoach, siwaz, a gempenn armoù hag a lazho tud ; ar soja a vez degasset betek Breizh da roññ boued fonnus da chatal ar vro, ez eo diwargoust eommioù kentañ an Trede Bed eo e vez goundet er broioù-hont. Red eo da beb heni labourad lec'h ma kav labour, ma teuo gantañ e damm kreun, hag heni e vugale. N'omp ket mestir war stad an traoù ; n'eo ket mestir al labourerien war mekanik bras al labour...

Ahanta ! N'eus tamm mezh warnomp, nag heni wenn hag heni ruz, bezañ embannet war niverenn 127 POBL VREIZH skeudenn pemp labourer eus Breizh. Ha perag e vefe vil ar skeudenn-se ? Vil eo labourad ? Hag ewid mont betek ar penn, moulet e oa bet an deizadur arag niv. 127 POBL VREIZH, ha kemeret an deizadur-se d'ober golo an niverenn-se. Achu !

Kamaraded ha kenvrois,
 Ar skridennoù a blij din ar gwellañ er gelaouenn eo ar re bellañ eus langaj moulet ar c'hostezennoù politikel evel « En tu all d'ar gartenn-bost », en niverenn 130. Pebezh gonid 'm bez o lenn POBL VREIZH pa ne vez ket skeud he c'hoar henañ » war he zro, ha pa zigor he bannoù da skrivagnerien a les o spered en e frankis, e-lec'h bezañ sord'hennet dalc'hmad gant al « linenn bolitikel » !... Ganeoc'h a galon ataw !

POBL VREIZH 4

HERE 1980
NIV. 127

1981

| GENEVAR | FEVRIER | MART | APRIL | MAY | JUNE | JULY | AUGUST | SEPTEMBER | OCTOBER | NOVEMBER | DECEMBER |
|---------|---------|------|-------|-----|------|------|--------|-----------|---------|----------|----------|
| 1 | 1 | 1 | 1 | 1 | 1 | 1 | 1 | 1 | 1 | 1 | 1 |
| 2 | 2 | 2 | 2 | 2 | 2 | 2 | 2 | 2 | 2 | 2 | 2 |
| 3 | 3 | 3 | 3 | 3 | 3 | 3 | 3 | 3 | 3 | 3 | 3 |
| 4 | 4 | 4 | 4 | 4 | 4 | 4 | 4 | 4 | 4 | 4 | 4 |
| 5 | 5 | 5 | 5 | 5 | 5 | 5 | 5 | 5 | 5 | 5 | 5 |
| 6 | 6 | 6 | 6 | 6 | 6 | 6 | 6 | 6 | 6 | 6 | 6 |
| 7 | 7 | 7 | 7 | 7 | 7 | 7 | 7 | 7 | 7 | 7 | 7 |
| 8 | 8 | 8 | 8 | 8 | 8 | 8 | 8 | 8 | 8 | 8 | 8 |
| 9 | 9 | 9 | 9 | 9 | 9 | 9 | 9 | 9 | 9 | 9 | 9 |
| 10 | 10 | 10 | 10 | 10 | 10 | 10 | 10 | 10 | 10 | 10 | 10 |
| 11 | 11 | 11 | 11 | 11 | 11 | 11 | 11 | 11 | 11 | 11 | 11 |
| 12 | 12 | 12 | 12 | 12 | 12 | 12 | 12 | 12 | 12 | 12 | 12 |
| 13 | 13 | 13 | 13 | 13 | 13 | 13 | 13 | 13 | 13 | 13 | 13 |
| 14 | 14 | 14 | 14 | 14 | 14 | 14 | 14 | 14 | 14 | 14 | 14 |
| 15 | 15 | 15 | 15 | 15 | 15 | 15 | 15 | 15 | 15 | 15 | 15 |
| 16 | 16 | 16 | 16 | 16 | 16 | 16 | 16 | 16 | 16 | 16 | 16 |
| 17 | 17 | 17 | 17 | 17 | 17 | 17 | 17 | 17 | 17 | 17 | 17 |
| 18 | 18 | 18 | 18 | 18 | 18 | 18 | 18 | 18 | 18 | 18 | 18 |
| 19 | 19 | 19 | 19 | 19 | 19 | 19 | 19 | 19 | 19 | 19 | 19 |
| 20 | 20 | 20 | 20 | 20 | 20 | 20 | 20 | 20 | 20 | 20 | 20 |
| 21 | 21 | 21 | 21 | 21 | 21 | 21 | 21 | 21 | 21 | 21 | 21 |
| 22 | 22 | 22 | 22 | 22 | 22 | 22 | 22 | 22 | 22 | 22 | 22 |
| 23 | 23 | 23 | 23 | 23 | 23 | 23 | 23 | 23 | 23 | 23 | 23 |
| 24 | 24 | 24 | 24 | 24 | 24 | 24 | 24 | 24 | 24 | 24 | 24 |
| 25 | 25 | 25 | 25 | 25 | 25 | 25 | 25 | 25 | 25 | 25 | 25 |
| 26 | 26 | 26 | 26 | 26 | 26 | 26 | 26 | 26 | 26 | 26 | 26 |
| 27 | 27 | 27 | 27 | 27 | 27 | 27 | 27 | 27 | 27 | 27 | 27 |
| 28 | 28 | 28 | 28 | 28 | 28 | 28 | 28 | 28 | 28 | 28 | 28 |
| 29 | 29 | 29 | 29 | 29 | 29 | 29 | 29 | 29 | 29 | 29 | 29 |
| 30 | 30 | 30 | 30 | 30 | 30 | 30 | 30 | 30 | 30 | 30 | 30 |
| 31 | 31 | 31 | 31 | 31 | 31 | 31 | 31 | 31 | 31 | 31 | 31 |

Abel Omnes, Sant-Brieg

A. Peogwir emä hon lenner a Sant-Brieg a galon ganeomp er stourm ewid ar brezhoneg, moarvad e pardono deomp ma raomp un tamm kempenn d'e heni :

1. Kentañ gerioù islinennet ; reishoc'h e vefe, a gav deomp, skrivañ : « ho niverenn 127, war ar golo 5 kanfard... » ; avel, « peogwir » e teu ar verb diouzhtu ; ahanta, neuse : « peogwir ez eo bet moulet ar gerioù... » ;

3. trede gerioù islinennet ; bez 'ez eus, gwir eo, kemmadurioù dirod, setu n'eus fass ebet amañ, dreistoll e gwenedez, pa ne vez ket gwaet ar c'hemmadur en hanw-kadarn o tont warlerc'h ur c'hentañ hanw-kadarn, Petra bennag ma tegass hemañ ar c'hemmadur e KLT ; gont-se, KLT « Bro-Gerneu », gwenedez « Bro-Kerneu ». Amañ neuse e vije bet gwelloc'h, marse, skrivañ « ar varc'hadourien win »...

B. Trawalc'h a bismigerezh diwar e'horre.

Ar vech ruz warnomp ?
 1. « Ar 5 kanfard » a weler war ar skeudenn damallet n'int na bambocherien na roullerien. Bez 'emaint o labourad, o c'houind o boued en ur viererezh eus Roazon. Bez 'e oant, kentoc'h, rag arag ar bresel eo e oa bet tennet o Joltrud dezo, pa oant war o labour. N'eus tamm ebet war o fass tress tud pouzh gant ar boeson, tress labourerien, labourerien eus Breizh leun a nobldeñ ne lavaran ket. Unan eus « ar 5 kanfard »-se zo bet tad da teizerer broadel an UDB ; « zo bet », rag

ARABAD ANKOUAAD :

**BEZ 'E C'HELLOMP
KASS « POBL VREIZH »
D'AR SOUDARDED
EWID NETRA :**

skrivañ d'ar gelaouenn

**MAR GOUIT
UN TAMM GALLEG,
LENNIT
« LE PEUPLE BRETON »
IWE...**

UDB

Paperenn ewid goulenñ mont e-barzh

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

Goulenñ a ran moneri e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (d'ar)

Sin :

19
Da gass en-dro
(trac'h et pe adskrivet) da
UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

Ur stourmad all

« Red eo diskar **Jiskar** », a skrivemp e rannbennad kentañ pennad-stur POBL VREIZH niv. 133, mis zo eta. Ha setu gwraet. Lakaet eo bet ar c'hozh roue da ziruilhañ mell-divell a-ziwar e dron uhel, ha 'm eus aon eo bet gwall vloñset o stokañ ouzh an douar. Pegen sioul eo chomet abaoe ! Ra vo ankouaet buan, ar buannañ 'r gwellañ...

Aet eo **Fañch Mitterrand** e-barzh. N'hellomp nemed bezañ laouen gant ar pezh a zo, memestra, un tamm evel ur burzhud. Lakaet he deus an UDB votiñ ewitañ en eil tro. Petra dalvez mouezhioù an UDB, ingalet war zouar Frañs ? Ma tap strollad emrenerien Vreizh un 3% a vouezhioù war zouar Breizh, pa vez kistion eus ur votadeg a sort gant heni Presidant ar Republik C'hall, e vez red rannañ an 3% dre 17, peogwir ne vefe nemed ur Breizhad war 17 sitoian gall... Ahanta ! Mad eo bet an traou, hag arabad chom da Dortañ kén.

Divodet eo bet ar Gampr gant ar Presidant newez, evel m'en doa lavaret en defe gwraet. Skubet eo bet al leur, hag emaoamp gant un dornadeg all.

Ma ! Mont a ray, mont a ra an UDB d'an emgann ur wech c'hoazh. Buan eo bet gwraet e soñj gant Burew Politikel an UDB ; lakaet er-maes eus ar jeu gant kondissionoù arc'hant ewid an « Europeaned », gant kondissionoù sinatourioù ewid ar « Presidantsialed », ne c'helle ket an UDB chom pelloc'h da rusañ : daw 'oa dezi lakaad tud war ar renk ~~de~~ wech-mañ. Epad ar c'hendivis bet 'raog ma voe gwraet e soñj gant ar Burew Politikel da vad, e voe zokén kenniget gant lod lakaad ur c'handidat war gement pastell-votiñ 'zo e Breizh : teir ha tregont. Siwazh ! Harzet omp bet adarre gant an arc'hant : n'hon oa ket tri milion ha tregont (a luriou kozh) da reiñ e prof d'ar Stad C'hall. Setu a-benn ar fin eo bet diviset ne vefe nemed pemzeg a gandidated o vont war ar renk.

Red eo d'an UDB, muioc'h eged biskoazh, reiñ he mouezh da intent. Ouzhpenn kement-se, bez' ez eo an tu kleiz liessort, netra 'med gant an tu kleiz gall, liessort c'hoazh e Breizh dre ma 'z eus ouzhpenn eus an UDB, an tu kleiz breizheg. Arabad disoñjal ez eus e-barzh gouarnamant **Mauroy** meur a ganfard diseblant krenn ouzh kudenn Vreizh. Red eo d'an UDB degass da soñj d'he c'heneiled eus an tu kleiz gall (ha pa vefent Bretoned) ez eus eus Breizh, degass da soñj d'ar Vretoned ez eus eus **Unvaniezh Demokratel Breizh** ewid dougen uhel banniel Breizh ha kemer preder gant interestoù labourerien Vreizh.

N'eus netra gwelloc'h eged ar botadegoù ewid kement-se. E-leizh a dud intereset gant ar politik, ingal ha bemdez, n'eus ket : gant e-leizh a draou all e vezont prederiet. Med pa vez ur votadeg war wel, neuse e ro peb heni, well-wazh, un tammig plass d'ar politik en e spered. Kasset 'vez d'an oll en oad da votiñ paperennoù ar gandidated o tiplegañ o frogrammoù a-hed hag adreus. ~~A~~ mod-se eo iwe e tegouez lizher-bruderezh an UDB e kement ti, e kement tiegezh eus ar bastell-votiñ ma vez ur c'handidat UDB o kabaliñ warni. A-dra-sur, ne vez ket lennet al lizher-se pizh gant an oll, pas muioc'h eged lizheroù ar gandidated all. Med, d'an nebeutañ, gwraet 'vez anaoudegezh e-gis-se gant an UDB, a-berzh Bretoned n'o devez ket bet lennet, na zokén gwelet, **Le Peuple Breton** pe **Pobl Vreizh**. Gwelet 'vez iwe foto ar c'handidat UDB war blassenn an ti-kêr,

ha tamm-ha-tamm e teu ar Vretoned d'en em voasañ ouzh an teir lizherenn-se : UDB. Tamm-ha-tamm iwe e teu an dud da lakaad un tammig urzh en o spered e-keñver traou zo : n'he deus an UDB netra da weled gant ar re a vese lâret dirag o fenn araog hag epad ar bresel diwezañ « Breiz atao, mad da la(z)o » (petra bennag ma oa rust ar varnadenn-se ewid al lodenn vrasañ eus tud **Breiz atao**) ; n'he deus an UDB netra da weled gant an FLB, petra bennag ma poagn lod — beteg tud e penn pe e-barzh strolladoù politikel zo — d'ober ar meskaj, ha da lakaad e-barzh ar memes sac'h an daou sigl-se...

En dro-mañ adarre e tiplego an UDB he frogram eta. Mes abaoe ur mis ez eus un dra bennag chañchet, peogwir emaa an UDB e-barzh majorite ar Presidant newez. Hi iwe, an UDB, he deus huchet d'an 10 a vis Mae d'abardaez : « Gounezet hon eus ! »

Bremañ neuse e vo red chañch meur a dra ha degass meur a wellaenn e Breizh. Ar strolladoù gall eus an tu kleiz n'hellont ket selled ken pizh hag an UDB ouzh tachenn Vreizh, dre ma 'z int bet savet ewid ar Frañs a-bezh, hag an UDB ewid Breizh hebmuikén.

Ar pezh a c'houlenn an UDB n'eo ket dister : an emrenerzh sokialour ewid Breizh. Gouzoud a ra an UDB ne vo ket tizhet ar pal-se diouzhtu, mes poent bras eo digoriñ an hent a gasso beteg ennañ. Red eo d'an UDB, ouzhpenn, roiñ dorn d'an tu kleiz, d'henn lakaad da vont war-raog, diwar al lañs tapet-gantañ d'an 10 a vis Mae. War veur a bastell-votiñ eus Breizh e vo bec'h bras etre an tu kleiz hag an tu dehoù : piw 'oar ha n'eo ket mouezhioù an UDB an heni a lak~~o~~ an tu kleiz da vont e-barzh ~~de~~ bastell-mañ-pastell ? Ha koulskoude ne c'hell ket an UDB bezañ mesket gant ar strolladoù gall eus an tu kleiz. Bez e c'houlenn adarre :

- ma vo labour e Breizh ewid an oll ;
- ma vo industrialiset Breizh en ur zoujañ an ekolojiez ;
- ma vo lâret nann ! d'an nukleel sivil ha d'an nukleel a-vresel ;
- ma vo roet ar gwir d'ar Vretoned da vezañ mestr en o bro ha da ren aferioù o bro int-i o hunan, hag ewid se e tle Breizh he femp departamant kaoud ur « statud ispisial », hag araog peb tra e tleer lakaad en he sav ur Vodadeg « Rannvroel » dilennet war-eeun gant oll Vretoned ar pemp departamant, ha diwar ar « proportionnelle » (« dre gevatalded ») ; bez' e tle ar Vretoned bezañ mestr war o ekonomiezh ha choas int-i o hunan an doare d'he c'hass war-raog ;
- ma vo difennet kement a ya d'ober personelezh distag ar Vretoned, ar brezhoneg yezh Vreizhiselis dreistoll hag araog peb tra, ur yezh m'eo skoret ganti iwe sewenadur galleg Breizh-Uhel.

Sed ase ur program na ra ket aon d'ar Vretoned kar-o-bro. N'eo ket c'hoazh an emrenerzh sokialour, med kass a ra dezañ.

Votiñ ewid an UDB d'ar 14 a Vezheven neuse, ma fell deomp disterraad galloud Paris — ha pa vefe eus an tu kleiz —, ha sikour lakaad pobl ar Vretoned en he sav en-dro.